

CANTIÇ VAR HENT AR GROAS.

TON : Deomp d'ar garnel, Kristenien, etc.

ARAUC COMMANÇ.

O Crux ave, Spes unica, etc.

Ni ho salud, Croas santel, c'hui eo hou esperanç :
En ho militou, Jesus, emma hon oll fizianç.
Roet graçou d'an dud santel, pardon d'ar bec'herien
Evit m'allimp ho meuli en envou da viken.

Deomp d'ar c'halvar, kristenien : kersomp varlerc'h Jesus :
Heuliomp gant ur guir glac'har hent ar Groas, hent
[poanius.

Roudou Jesus so merchet gant goad ha gant daëlou
En deus scuillet en hent-se evit hor pec'hejou.

En em zaoulinomp eta dirac neb station :
E poaniou Jesus songeomb gant guir gompasion.
Biken ne vo var an douar, n'en deus ket bet biscoas
Poaniou ker bras, ker grevus vel re Jesus var groas.

I. STATION.

Jesus condaonet d'ar maro.

O setanç an injusta ! Condaonet eo Jésus
Da vervel var ur groas e creis poaniou scrijus.
Mes neket Pilat hepken, ni oll er c'hondaonas
En eur grial da Bilat : staguët-èn ous ar groas.

DISCAN EVIT AN DAOUZEC STATION KENTA.

O va Jesus, peker bras eo bet an tourmanchou
Oc'hens souffret (er plac-mâ) evit hor pec'hejou !
Ni so caos, o va Jesus, ens ho poaniou ker cri :
Pardon, pardon, va Jesus ! Nan, n'ho offansimp mui.

II. STATION.

Jesus o touguen he groas.

Jesus, pa velas ar groas evitàn preparet,
A redas d'e brieta gant joa ha gant respet :
O croas va zad, emesan, varnoc'h tà e varvin !
Me sougo a galon vad ar groas rei Doue din.

III. STATION.

Jesus a gouëc'h didan he groas.

Ar groas so hir ha poner : didan a gouëc'h Jesus.
Calonou ar vourrevieu a so didruezus.
Lec'h e sicour da sevel ha da zouguen he groaz,
Oll a ront d'àn toliou treid, toliou dorn, toliou baz.

IV. STATION.

Jesus a rancontr he Vam.

Mari o velet he mab pleguet didan he groas
A vouchas d'àn n'eur ouëla : Jesus ive ouëlas.
Kenavo, o va mab quæs ! C'hui po ur maro cri !
Meskomp ive hou daëlou gant Jesus ha Mari.

V. STATION.

Simon Cyrene o touguen he groas da Jesus.

C'hui so eürus, Simon, da veza bet choaset
Vit douguen varlerc'h Jesus he groas benniguet !
Mar souffromp evit Jesus hor poaniou er bed-mâ,
Ni sougo evel Simon lod eus he groas gantâ.

VI. STATION.

Veronicq a sec'h he visulech da Jesus.

Façz Jesus ne deo met goad : Veronicq en torsas.
Ha Jesus en he mouchour he visaich a verchas.
Eus a lorgnes ar pec'het nettaït mat ho ene :
Un ene e stad a c'hraç, a so imaich Doue.

VII. STATION.

Jesus a gouec'h evit an eil gueich.

Jesus a gouec'h un eil gueich didan he groas santel :
Ar vourrevien didruez sco varnàn da sevel.
Oh ! pebeus poan ret, pec'her, d'ho Salver benniguët.
En eur zistrei un eil gueich d'ho pec'het miliguët !

VIII. STATION.

Jesus a rancontr ar grouagues.

O grouagues Jerusalem, c'hui ouël var ma foaniou.
Ah ! kentoc'h goëlit varnoc'h, var ho bugaligou.
Rac mar souffran ker bras poan vit pec'hejou ar bed,
Petra souffrit-hu eta mar varvet er pec'het ?

IX. STATION.

Jesus a gouec'h evit an drede gueich.

Tostaât a ra hor Salver eus lein menez Calvar,
Ac evit an deirvet gueich a gouec'h, he façz d'an douar.
Mar deo ker poner he groas, mar gouec'h lies d'an douar,
Hor pec'hejou a so caos : ah ! goëlomp gant glac'har.

X. STATION.

Jesus divisquet gant ur Vourrevien.

O Jesus, pebeus tourmant ! lemel rer ho tillad.
Ho blessou en em zigor : ho coad red a boullad.
Pebeus mez evit Jesus, e noaz dirac an oll !
Bezit mez, o tud lubric : ne vezit mui diroll.

XI. STATION.

Jesus stagnet eus ar groas.

Daouarn ha treid hor Salver so treuset gant tachou :
Ar goad a strineq e bep tu : an oll a scuill daëtou.
Pebeus anquen vit Mari ! pebeus affliction !
Pep taul so un taul gleze hac a dreus he c'halon.

XII. STATION.

Jesus a varv var ar groas.

Goëloimp... Maro eo Jesus ha maro var ur groas !
Maro eo etre daou laër e creis tourmanchou bras.
Mes piou eta a so caos eus ur maro ker cri ?
Goëloimp, goëloimp gant glac'har... Ah ! hor pec'hejou'ni.

XIII. STATION.

Corff Jesus distaguet eus ar groas.

Costez ha calon Jesus so gant ur lanc toulet,
Hac etre divrec'h Mari he gorff sacr so laket.
Maoües, ha c'hui eo he Vam ? Ha hennès eo ho mab ?
Itron Varia a druez ! O pebeus calonnad !

DISCAN EVIT AN 13 HA 14 STATION.

Mari, o Mam a c'hlac'har, mantret eo ho calon,
O velet poaniou ho mab epad he oll bassion.
Caos omp eus poaniou Jesus hac eus ho re, Mari.
Itron Varia a druez, pedet evidomp-ni.

XIV. STATION.

Corff Jesus laket er béz.

O tristidiguez hep par ! O devez a zaëlou !
Mari a interr he mab maro en tourmanchou.
Interromp hor pec'hejou : n'offansomp mui Doue :
Ha graomp ur guir binigen evit monnet d'an êe.

Peden.

Trugarez doc'h, va Jesus ! græt emeus hent ar groas :
Songet emeus gant glac'har en ho tourmanchou bras.
Biken mui n'ho offansin : me ra doc'h ma c'halon :
Roet din brema, va Jesus, ho benediction.

Ober alles hent ar groas.

Evel Mari, kristenien, greomp lies hent ar groas :
An hent eo d'ar barados : gounit rer graou bras,
Induljanç vit ar re veo, ha vit ar re varo.
Ur voyen vras eo eta evit mont d'an Envô. Amen.